


EMSAV

EBREL 1972

NIV. 64



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

C'hwec'hvet bloavezh

Niv. 64 - Ebrel 1972

An niverenn : 3,00 F

Koumanant-bloaz : 30,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz genver

EMSAV

B.P. 125, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

An Emsav hag ar Vro (48) [EMVR-315 - 321] 64/107-118

Lizheroù /107-108. Danevelloù obererezh :

Emzevrann /108-117; Strollad Komunour Breizh -

Dezrann ha diaweloù bellerezhel /117-118.

Notennoù kevredadel (5) Kevredadouriezh a-zonder 64/119-135

A N E M S A V H A G A R V R O (4 8)

LIZHEROU

A-zivout Emdroadur an armerzh hag ar gevredigezh e kêr Douarnenez en 19t kantved, Emsav 62/48 1972, & Notenn (32)/60-61 :

"Arzaeladus e kavan ar pezh a zisplegez a-zivout LE BAIL. Da'm meno eo ret adlec'hiañ e gomzoù en amveziadoù ar mare ma oa gounidusoc'h d'ar besketaerion pesketa nebeud eget kalz. Berrwel eo bet ar paotr marteze pa na ginnige nemet rekipeoù war verr dermen (marteze edo o kestal mouezhioù), hogen piv oa chalet er mare-se gant diskoulmoù war hir dermen ? ket ar c'hreantourion a dra sur.

"Un dra a'm souezh koulskoude : hañvalout a ra ar c'hreantourion ober ar pezh a blij ganto. Mar bije bet kreñv nerzh ar vicherourion hag ar besketaerion, o dije ranket plegañ (war briz ar pesked, da skouer).

"Abeg zo da gaout e LE BAIL pa denn e ginnigoù da wanaat ar besketaerion vrezhon e-skoaz re Spagn pe Portugal. Pe marteze e soñje e oa forzh penaos barnet an traoù-se d'ar marv hag e oa d'ar mare-se kenkoulz arboellañ ur c'hemm aner na gemme erziwezh netra (doare soñjal etre an daou vrezel-bed, un tammig a-raok hag un tammig goude ivez).

"Ha n'eus ket traoù all e devoud emzalc'h ar Stad c'hall ? Gouarnamant ar mare zo republikan a-enep an Iliz - lezenn 1904 a-enep ar skolioù prevez he doa lakaet reuz da sevel e Breizh. Marteze ne oa ket gwall chalet ar Gouarnamant da lakaat muioc'h a reuz da sevel er vro; marteze ivez e oa kamaladed feal da drugarekaat amañ hag ahont evit afer ar rouedoù berzet ?"

(15 02 72)

EMVR-315

A-zivout Emdroadur an... p.m., Emsav 62/39-64 1972 passim :

"Ar pezh a lavarez war orin ar bouedvirerezh ne glot gant ar pezh a ouzon. APPERT ne oa ket naonedat. Kavet en doa an doare da boazhañ boued e podoù gwer gant dour. E 1823 e voe graet gant un doare nevez e Naoned. COLIN a arveras eoul e-lec'h dour ha boestoù houarn e-lec'h ar gwer. An embregerezh kentañ a savas e karter ar Salorges war ar porzh.

"Evit an diouer a c'hreanteladur e oa liammet strizh ouzh an diouer a renkad-ren. Ne gav ket din e veze entanetoc'h micherourion Frañs gant an araokadennoù kalvezel. Emzalc'h ar berc'henned e voe en orin an enkadenn pe kentoc'h e lakajont enkadenn ar gevredigezh henvoazel da badout. An dud a save embregerezhioù oa bourc'hizion grenn - erfin se a soñjan da heul ar pezh a'm eus kavet. War un dro e oant levezonet gant ar gevredigezh henvoazel (liammoù tiegezhel dreist-holl) hag e oant levezonet ivez gant sevenadennoù ar gevredigezh c'hall dre ar studioù o doa graet e Paris pe forzh penaos e skolioù Breizh (marteze e Roazhon ha Naoned) renet gant

Gallaoued pe tud gallekaet. Stag int ouzh stummoù diavaez ar c'hevredigezhioù a zarempredont. Ne zezrannont ket saviad Breizh hag e welont ar greanteladur (pe an arackadennoù kalvezel) war skouer Frañs evel un disoc'h eus o strivoù hiniennel. Ar gevredigezh henvoazel a vezont evel tonket da vont da get pa vir ouzh pep arnevessadenn." (18 02 72) EMVR-316

"Lavarout a ra T "ne vez ket tizhet ar sell emsavel dre un taol-hud goude daou vloavezh a labour emsavel". Mar en deus dibabet labourat en Emsav, e oa gantañ ur sell emsavel da nebeutañ war ur poent. Ha kaout ur sell emsavel war ur poent, pegen bihan bennak ma ve, zo a-walc'h evit ma teufe buan ar sell emsavel da aloubiñ ar vuhez a-bezh evel an tan ur wech peg en ur c'horn eus ar c'hoad oc'h emastenn d'ar c'hoad a-bezh. Moarvat n'eur ket mestr war enaoudigezh ar poent kentañ, - un doare awen eo a laka an dud da doataat d'an Emsav, hag ivez evel just c'hoari dall an degouezhioù hag ar c'hejadennoù. Hogen, ur wech peget an tan, e c'haller e lakaat d'en em astenn buan, dre zegas a-wel an dislavaroù etre an doare-bezañ nevez ez eo hag an doareoù-bezañ kozh. Un afer a boellerezh hag a zaererezh e teu da vezañ, hag an den aze a c'hell bliñañ e-unan an argerzh-emsavelaat eus e vuhez. Diegi hor bez o plediñ re gant seurt krefen a zivezouriezh emsavel, - moarvat rak an da sevel reolennoù a ve santet evel moustrus, - se ne vir ket e ranker plegañ, a-hiniennoù, da reolennoù a zivezouriezh mar fell dimp bezañ emsaverion efedus ha kas an dispac'h war-raok." (26 04 72) EMVR-317

DANEVELLOU OBEREREZH

Emzezrann

Perzh a gemeromp e meur a istor war un dro : hon istor personel, istor an Emsav, istor ar vro, istor ar bed... An istorioù diforc'h-se a gej e lies doare; ne gejont ket dre ret avat hag, ouzhpenn ma chom teñval peurliesañ al lec'hioù hag an doareoù ma kejont, e vez etrezo disklotadurioù, enebadurioù, dislankoù ha, gwasoc'h c'hoazh, troc'hoù mut. Anaout a reomp an disklotadur hag an enebiezh a voe etre an Emsav hag ar vro etre an daou vrezel, an islonk mut a chom etre ar vro hag ar bed. Roll an dezrannañ eo degas goulou war al lec'hioù teñval, displegañ an disklotadurioù, lakaat ur poell el lec'h ma'z eus un troc'h. Evit a sell ar c'heñverioù etre hon istor personel hag an istorioù all, n'eo ket disheñvel e roll : an diforc'h etre an emzezrann hag ar seurtoù dezrannoù all eo al live ma vez graet. Dre an emzezrann e taol an istor personel e c'houlou war istor an Emsav, ar vro, ar bed, evel ma tegemer ivez sklerijenn diganto. Diziousus eo ar c'henskliseriadur-se ha studi ebet renet en ul live all ne bourchas an e lec'h ar frouezh a zeu diwarneñ. Pep emzezrann a verk ur c'hammed war hent an holl-elaat. E emzezrann kentañ zo evit an den an dro da reiñ d'e vuhez tremenet ha bremañ ur pleusk istorel kentañ. War un dro, an holl-

elaat hiniennel zo bepred lodek en un holl-elaat ledanoc'h. Da brouenn emañ ar skrid embannet emañ dindan, diwar an notennoù dastumet e-doug un heuliad dalc'hioù-labour a-stroll e diabarzh ur Gellig. EMVR-318

"Brezhoneger a-vihanik on. Er skol hepken e'm eus desket galleg. Evidon e oa ar galleg yezh ar skol evel al latin yezh an iliz. Ar skol oa an enezenn c'hallek a veze hepkoret pa veze tu. Pa oan bihan hon eus klasket va breudeur ha me skrivañ gerioù brezhonek. "Eus ur metou kouer e teuan. E 1953 pa'z on deuet d'al lise e Pont-n-Abad ez on bet argaset gant tud an aod ha tud kêr, gallegerion an darn vrasañ anezho. Kouer e oan ha ne ouien ket mat ar galleg.

"El lise kalvezel e Brest e voe asoc'h din. Eus ur metou kouer e teue un darn vat eus ar skolidi, hag a bep korn eus Breizh. Ur c'helennet eus al lise a oa stebek en ur bagad ha klask a ris kemer perzh er bagad-se; met ne voen ket degemeret peogwir ne oan ket o chom e Brest. Dedennet e oan gant ar gwiskamantol breizhek ha dastum a raen kartennoù-post ha levrioù war an divoud. Prenet e'm boa Goutenn ar Werc'hez a glaskan lenn (ar wech kentañ e oa din kavout brezhoneg skrivet) hag ar gelaouenn Brud.

"E 1958 e teuis da b'Paris da labourat e ti Citroën. Eno ez ad-kavis div renkad : ur renkad uhel gant Gallaoued hag ur renkad izel gant Breizhiz. Klevout a raen "mao" (= Breizhad) pe "sale mao" evel a'm boa klevet er skol e Pont-n-Abad "paysan" pe "sale paysan".

"Ur wech on net da Gêr-Vreizh. Eno e'm eus kavet un nebeut koshidi o tommañ e-kichen an tan, o trailhañ ur brezhoneg iskis, hag ouzh va lezel da dreiñ er sal. Erfin e oa deuet Gw. LE MENN davedon. Un eñvor fall a viris eus va gweladenn.

"E 1960 en "arnod al lu" e voen degemeret evit bezañ danvez ofisour. E derou va amzer-soudard e'm eus tremenet pevar mis o prientiñ ur genstrivadeg evit mont da skol an danvez ofisourion e Tours. Algerianed eus va oad a oa eno, degaset di gant al lu gall evit mirout outo a vont gant an F.L.N.; kouerion e oant, ne ouient ket skrivañ na lenn, ne ouient ket koma galleg, a-rack neuze n'o doa ket kuitaat o 'douar'. Isofisourion aljeriat a ras war o zro; kelennet e veze galleg dezho. Chomet e oant izeloc'h c'hoazh eget Breizhiz.

"E Tours e'm eus santet an arme evel ur "familh vras" : un Algerian danvez ofisour oa mignon bras din, degemeret oamp evel ar re all, an Algerian pergen. An urzh a oa er gevredigezh : Gall, Breizhad, Algerian (un nebeut Algerianed a oa e ti Citroën, o samañ al labourioù startañ ha lousañ a veze graet a-rack gant Breizhiz), ne veze ket kavet ganin e lu.

"Ouzhpenn se, war 170 danvez ofisour e voen degemeret e-toues ar 50 ofisour : gall e oan deuet da vezañ. Bezañ ofisour e lu gall a amplege bezañ gall penn-kil-ha-tread.

"Goude Tours edon e soñj "mont da skoasellañ Algeria d'en em ziorren" e-ser ar "Section Administrative Spécialisée". (Un stebeg eus SAS evit ur c'horn-bro a ras war-dro pep tra er c'horn-bro-se : skol, gounit-douar, naetadurezh, h.a.; skoasellet e veze gant tri pe pevar soudard gall ha Harkied. Anet e oa din e oa ret skarzhañ

an F.L.N. e glaske distrujañ al labour graet evit sevel pe adsevel ar vro-se. (A-zivout an F.L.N. ne ouie nemet ar pezh a veze kontet dimp gant an ofisourion-stummerion. Ouzhpenn se ne veze ket lezet dimp e Tours kalz amzer d'en em soñjal).

"Ma ne oan ket gwall chalet gant brezel Algeria a-raok mont da soudard, daoust din da vevañ e Paris ha da gaout daou vreur o vrezelliañ du-se, goude c'hwec'h miz er skol o teskiñ dre ar munud penaos stourm ouzh ar c'herc'hvellerzh hag ar gourzh-bellerezh e oan deuet da vezañ startañ difenner tezennoù an "Algérie Française". Ur redi e oa evit ar c'hlevion nevez deuet er-maez eus ar skol, evit difenn ar mennoziñ sanket mat enno, mont da Algeria da jiboesa ar Fellagha'ed. Ar pezh a lakaen start e'm soñj, hag a galon laouen. Met degouezhout a reas ganin un amaezh el lu gall (F.P.A.) en Alamagn, evit c'hwec'h miz; goude se e vefen aet da Algeria. Va soñj a oa graet ivez da chom el lu, hag evit se e oa mat kaout ur skoazell (pe ur paeron) da aesaat an degemer. Met evit va brasañ dichañs e oa ar paeron-se ur mignon bras d'ar Mael ARGOUD a oa er c'houlz-se o redek dre Alamagn o klask kendrec'hiñ an ofisourion da vont a-du gant al luskad "Algérie Française" a-enep DE GAULLE. Nebeut amzer goude e voe barnet va faeron da seizh vloaz toull-bac'h evit bezañ degemeret ARGOUD en e di. (E 1961 emaoz, komz a reer eus emrenerezh Algeria, mare Evian eo). Setu ar pezh a viras ouzhin a chom el lu hag ivez a vont da Algeria. Ouzhpenn se e voen klañv e-pad c'hwec'h miz; pevar miz diwezhañ va c'hlevion a dremenis e Breizh. Goude se (e derou 1962) e kuitais al lu hep bezañ gallet kas va youl da vat, ha dizonet diouzh va c'hoant lakaat da dalvezout kentelioù ofisourion E.A.T. Tours.

"Betek gwengolo 1962 e chomis er gêr da skoazelliañ va zud. Perzh a gemeris en emvoudoù an F.D.S.E.A. gant va zad : kudennoù kalvezal a veze pleustret dreist-holl, nebeut a gudennoù politikel (dindan baeroniezh ar prefed e veze an emvoudoù).

"E gwengolo 1962 e tistrois da bParis. Evel "Officier de Réserve" e oan endalc'het da heuliañ kentelioù ha prantadoù. Un enkadenn a voe el lu gall d'ar mare-se pa voe diskarzhaed : tamm-ha-tamm e veze diskarzhet an ofisourion varrekañ, re all a yae kuit digalonekaet.

"E Paris e 1962 e tistrois da labourat e Citroën. Labourat a raen en ur burev-studi ma ne veze ket graet a ziforc'h ken etre Breizhad ha Gall : ar "mac" a oa deuet da vezañ "breton". (N'eo ket forzh piv a labour er burev-studi e ti Citroën). Nebeutoc'h a gudennoù a voe c'hoazh pa zeuis da vezañ ezel eus ar bennez. (Ne oa nemet gortoz evit ma ve kresket va fae hag evit pignat uheloc'h en urzhaz; war-bouez enebañ ouzh ar C.G.T. ("chasse aux sorcières") ne oa netra dreiststandur).

"Pa zistrois da bParis ez is da chom e ti ur genitery din a werzhe danzeadoù breizhek (dilhad Le Minor, levrioù Al Liamm, Al Liamm, A.B.K., h.a.). Di e teue G.PENNAOD, KERLANN, KERV-ELLA, ar gCAOUISSINed, ha tud e-leizh eus al luskadoù folklorel. Ne welen ket ar pezh a glaske KERLANN o tesevel e verc'hig e brezhoneg; ha da gentañ-penn e'm boa poan ouzh o c'hompren. Bep sul e-pad an hañv ez aen gant va c'henitery da bardonioc'h

breizhek eus bannlev Paris da werzhañ levrioù, priadoù, h.a.. Gant tud al luskadoù folklorel e'm boa darempredoù dreist-holl; displej- et oan o welout tud oc'h emdrezwiskañ, se oa ober goap ouzh ar re a zouge o'hoazh o c'hoefoù. E 1968 eo aet kuit va c'henitery eus Paris.

"E-tro 1966 ez on aet en-dro da Gêr-Vreizh, ambrouget gant N. JEGOU. Eno e'm eus kejet gant PENNAOD, DREAN, JOLAIS, LE NAIL, L.LEMOINE. D'un emvod eus ar M.O.B. ez is : c'hwec'h den a oa evit Paris a-bezh. Ganto ez is da vBallon : LE NAIL, MAINGOURT, Yann MAZE a oa e'm c'harr. Ne oa nemedon a ouie komz un tammig brezhoneg. E Roazhon ez omp aet leurgêr al Lisoù ma'z omp en em gavet dirak A.AL LOUARN; me'm eus komzet gantañ.

"E-pad ar veaj e'm eus bet tro da selaou komzoù izili ar M.O.B. : hunvreoù kaer e oa evidon. "Foutre les Français à la porte" ne gaven ket sirius; evit lavaront be n'o doa morse bevet e Breizh, hag e hunvrent Breizh. Met ar re-mañ a hañvale en em gemer a-zevri. Ha koulskoude e oant studierion (tud a yae bemdez da labourat sirius gant o spered, evel ma'z aen-me da labourat bemdez war va micher). E Ballon e voen laouen o welout begennoù ar Mouvement Breton (renerion azadurioù, kelaouennoù pe all) : DENEZ, OLIER, Camille LE MERCIER D'ERM, h.a.. Dipitet on bet gant an dizurzh a rene el liderezh; n'eo ket ar pezh a'm boa anavezet el lu gall.

"Goude Ballon e'm eus lennet La Bretagne écartelée gant Y. FOURE. Ar wech kentañ e oa din lenn ur skrid ken skogus a-zivout darvoudoù Breizh etre 1938 ha 1948. Ur barrad konnar zo savet ennon goude lenn al levri-se. (An hevelep traoù a'm boa klevet endeo a-glez hag a-zhou; met amañ e oant skrivet ha dastumet).

"En-dro da Gêr-Vreizh en em gav an holl re yaouank a-tro 1967. Kaoz a zo m'en em lakfe holl izili strollad E.S.B. Paris war ar roll evit bezañ dilenet e burev nevez Gêr-Vreizh; met pa zeuas dez an dilennadeg en em gavis va-unan, rener Gêr-Vreizh e oan e c'hvevrer 1968. Buan e teuis da vezañ skuit o selaou Kêrvreizh oc'h ober an diapaç'h bep sadorn hep mont er-maez eus ar Chouchenn Klub hag o tieubiñ Breizh gant gerioù toull pe o komz evel pa vije Breizh dieub. Seblantout a raent din bezañ gwall bell diouzh kudennoù Breizh; n'eo ket oc'h en em dreñf war-du an tremened e vefe diluziet ar c'hudennoù-se. Dav e oa skeiñ start (mont en F.L.B.) evit o dihuiñ hag o rediñ da emellout en aferioù pleustrek.

"Koulskoude un hent all a hañvale bezañ digor dirazon. Heuliañ a raen strollad E.S.B. e Paris ha klask lenn EMSAV abaoe an derou (an emvoud a veze graet e'm di). Met poan a'm boa o heuliañ an emvoud : kudennoù a yezh a save, deuet e oan a-benn d'an em siober eus va zeodyezh vigoudenn met ne'm boa ket tizhet o'hoazh live EMSAV hag aze en em gaven gennet. Ne gompren ket kennebeut emalc'h izili E.S.B. Paris eus ar mare, a gaven hunvrel : setu studierion na anavezet Breizh nemet e-pad an enannoù evel touristed, mibion bourc'hizion diavenet mat er frama gall oc'h en em siduiñ o c'hoari Breizh dieub; pegen iakis e oa gvelout anezho e skrivañ "Bevet Breizh" pe "Bretagne libre" (ret e oa bezañ komprenet gant ar Barizianed) war vogerioù ar metro. Ha me soubet bep gwec'h ma tistroen da Vreizh e kudennoù ar gounezerezh a oa neuse o virviñ (Kemper, mare 1967); rak va zad deust a-benn da sevel unan eus brasañ atantoù kanton Pont-'n-Abad a strive kalz evit tizhout ar palioù en doa dibabet, hogen bep gwec'h e oa un hanterc'hwitadenn

dre fazi an amezhieresh gall.

"Devezhiñ studi a vese azet, met e-pad an ehanñ skol ha me o labourat en ur greanti ne oan ket evit kemer perzh en Emsav-se, digor hepken d'ar gelennerion ha d'ar studierion.

"Heuliet 'm boa er c'helaouennoù, evel an holl, obererezh an F.L.B. betek ar 15 mae 1968 ma teuas un szel eus ar strollad kuzh-se da'm gwelout. Kaset oa bet betek ennon gant ur c'heneil din a chomas disant, hag en em ginnig a reas kannad F.L.B. e brezhoneg.

"Evel ma oa un nebeut devezhiñ goude gwalldaol kazarn an 13^e CRS e Sant-Brieg e komzjomp diwar-benn an tarverezh-se hag ivez a-zivout Breizh dre vras. Ur skoazell arc'hant a c'houlennas, na rois ket, hogen goulenn a reas ivez an aotre da zont en-dro da'm gwelout, ar pezh a reas nebeut amzer goude. Met gant ar freuz hag ar reus a rene e Paris en amzer-se (mae 1968) e oan kalz suloc'h prederiet gant darvoudoù ar greanti ma labourer hag e felle din ivez arvestiñ ouzh buhez ken dibarek straedoù Paris d'ar mare-se. Dont a reas Pierre HENRI, evel ma vese anvet, da'm gwelout ingal a-walc'h betek an ehanñ, da lavarout eo mia ecst. Ne zeuas ket a-benn da'm c'hendrec'hiñ. En em gavout a rejomp e gwengolo adarre, hag adalek ar mare-se e kemeris ur perzh oberiant en aferioù an F.L.B. betek genver 1969 na voen kraouiet.

"Va engouestladur en F.L.B. a c'hoarvezas en ur prantad mat : goude taol kazarn Sant-Brieg a reas kalz a drouc en Europa hag e-pad darvoudoù mae 1968 na hañvale pep tra gallus e Paris. (Tarzh-adenn Sant-Brieg a gawe un heklav ennon; e darvoudoù miz mae e oan un arvester : gwech diouzh tu ar studierion, gwech diouzh tu ar fliked; gwech diouzh tu ar batromed (kost enebec'hwel), gwech diouzh tu ar vicherourion (dibunadeg, mouezhiadeg a-du gant an ec'hwel)). Bez' e oan ivez o klask distreiñ da Vreizh, rak bep gwech ma teuen da welout va c'herent e oant atav ouzh va fourgasañ gant se, ha ne zeuen ket a-benn da gavout gourc'hwel er vro. Heuget e oan gant buhez Paris ha disoc'hoù an ec'hwel e ti Citroën. (Betek dibenn 1968 ez eus bet ec'hwelioù e ti Citroën. Ar vicherourion a grede dezho e vefe echu gant ar gwaskerezh mat a vez buhez e ti Citroën e pep derez eus an urzhas. Goude an espredadeg a heulias an ec'hwelioù e voe anat d'an holl ne oa netra kemmet).

"Koulskoude adalek miz du 1968 e verzis e'm boa kemeret un hent fall : seul vui ma kejen gant tud E.S.B. (LEMOINE, JOLAIS, JESTIN, LE MAIL - an tri-mañ diwezhañ a voe izili betek eost 1969 hepken) ha ma lennen Emsav, seul nebeutoc'h e welen war betra e tiboukfe F.L.B.. Hag an hir a brezegenn graet gant G.ETIENNE d'an 12 genver 1969 e Kêrvarker a lakaas kement a strafuilh ennon ma ris va soñj dilezel krenn an F.L.B. : ar wech kentañ e oa din klevout un dez-rann klok eus istor Breizh a-bezh; lennet 'm boa POISSON ha CHAR-DRONNET, met ne oa enno nemet darvoudoù hep liam kenetrezo, ha brogarouriezh; ar pezh a venne E.S.B. ober oa fraezh, azas, ha lavaret a-ouez d'an holl. Met kemeret 'm boa perzh en darvoudoù, bez' e oan don e-barzh ha roet 'm boa va ger, ne oa ket tu din da gilañ. Ha dreist-holl e oa endec tud en toull ha sellet e vefe bet va dilez evel un dec'hadenn gant an son; hag an obererezhioù eus ar sizhunvezhiñ o tont a oa ouzhpenn se graet evit dieubiñ hon c'heneiled toullbac'het. Neuze dilacouen ez is d'an ebad diwezhañ (23 genver 1969).

"Ur wech en toull e oa echu pep tra evit an darn vrasañ eus tud F.L.B.. Evidon e viren deltu mat o c'hourout e oa tud all (E.S.B. pe get) o kenderc'hel da labourat er-maez. An holl draoù a c'hoarveze ne virent ket outo a labourat.

"O tont er-maez eus an toull e'm eus kejet gant tud E.S.B. Paris; war-bouez unan e oant diasaet dirazon (diskarzhet int bet abaoe). "En ehanñ 1969 ez eo aet kuit an holl eus Paris. Eno on chomet o klask ul labour all.

"Goude bezañ harzet e oan bet ambrouget da di Citroën etre pevar foliser - 6 eur tramen e oa, pa oa aet kuit ar vicherourion, rak diskouez azebeg an arnodva etre pevar foliser ne vez ket graet e ti Citroën. Pa's on bet en toull e'm eus bet ul lisher digant va rener o c'houlenn diganin hag ez adkrogfen gant va labour. Goude bezañ didoullbac'het e'm eus goulennet un emgav digantañ. Degemeret on bet e ti Citroën el lec'h ma vez degemeret an dud eus an diavaez. Ul labour so bet kinniget din en ul lec'h all : "El lec'h ma vi, a lavare din ar paotr, n'eus den nemet da rener nevez a oar ez out bet en toull; arabat dit dareprediñ ar re a labourer ganto a-raok". E gwir el lec'h ma oan e ouis an dud e oan bet en toull, met dan n'en deus komzet eus se ganin.

"(Iukis e oa kemmet an traoù evidon goude dont er-maez eus an toull. A-raok, e'm boa doujañs evit an urzhas - e ti Citroën hag e lec'h all. Goude ne oan ket evit lavarout "c'hwil" d'an dud, "te" a lavare d'an holl.

"(Va labour nevez ne glote ket tamm ebet gant ar pezh a'm boa graet betek neuze. Goulennet 'm boa ober un dra all mat nac'het e oa bet ouzhin.

"(An arnodva pleustrek ne oa ket pell diouzh el lec'h ma labourer en ha c'hoarvezet eo din kejañ gant ar vicherourion ma oan ganto a-raok, na komz ganto. Hep gouzout din o deus goulennet ma teufen en-dro e penn an arnodva pleustrek; hogen tud ar C.C.T. a zo aet d'ober ar goulen; gwashoc'h eo bet evidon.

"(Goulennet eo bet diganin labourat diouzh an 3 x 8; pemp pe c'hwec'h vloaz a-raok e'm boa sinet ur baperenn oc'h asantiñ da se, pa na oa anv e gwirionez nemet eus an 2 x 8. Ne oan ket snta evit nac'h. Roet 'm eus va dilez e here 1969).

"E-pad ehanñ 1969 enta e klasken ul labour. O chom edon e ti keneiled, gwech e ti unan, gwech e ti egile. Bevañ a raon diwar skoaziadennoù digant Skoazell Vreizh hag U.D.B.. E genver 1970 e'm eus kavet gourc'hwel en Inter-Ecco.

"E gwengolo 1969 eo bet danevellet din un endervesh-pad diskarahadeg eost, gant JOLAIS hag A.NOGUES; nebeut goude e voe danevellet din ivez gant T.AL LOUARN. Afer an "dud stummet" a oa un tsol-Stad pa na oa ket bet mouezhiadegoù. Lavarout a ris dezho e oa gwall vugeliel bezañ aet kuit eus E.S.B. evit abegoù a seurt-se. Koulskoude on bet digalonekaet gant diskarahadeg E.S.B.; dic'hortos a-grenn e oa evidon.

"Goude se ne ouien ket re vat petra ober. Rener Kêr-Vreizh e oan bepred, ha kendalc'het 'm eus da ober kentelioù brezhoneg eno, dre voaz, dre vignonlezh, hag ivez gant ar soñj reiñ ur studiour breizhek d'an dud a seue di.

"E 1970 e'm eus kejet tost bep sador gant U, eus adkellig 75. Pa vese U e Kêr-Vreizh e taveen dezhañ an dud nevez a seue da Gêr-Vreizh. En derou ha pa na vese ket U aze en o daveen da dud E.S.B..

Fellout a rae din en derou chom neptu e-keñver diskardhadeg 1969.

"E dibenn 1970-derou 1971 e'm eus eskemmet lizhiri gant V a-zivout Kêr-Vreizh. Desrannañ a rae Kêr-Vreizh evel sozadur ledem-savel hag a-du e oan dre-vras gant an dezrann. Met soñjal a rae din c'hoazh e c'hallfe Kêr-Vreizh bezañ ul lec'h-tuta evit E.S.B..

"E derou 1971 e teuas V da ober un emvod-kelaouañ gant va skol-idi e Kêr-Vreizh. Ur c'hwitadenn e voe : ar skolidi ne oant ket deuet da zeskñ breshonag evit abegoù emsavel. Kaer e oa bet din komz eus Breizh hag eus an Emsav e pep seurt doareoù, gvershañ ESB i d'an holl, ne ersavjont nepred pe e oa diboc'h e ersavioù.

"Abaoe dibenn 1970 endeo e oa anat din e oa ret din kuitaat Kêr-Vreizh ha war zigreskiñ ez ae ar persh a gemeren en sozadur. (Klask a raen lakaat tud E.B.V. e penn an sozadur, met ne gemerjont ket ar boan da gemer ar penn).

"Hogen n'eo ket Kêr-Vreizh hepken a'm boa da guitaat.

"Dre gKêr-Vreizh e'm boa anavezet ur bern tud. Dre va micher ivez : abaoe derou 1970 e oan penn-koskor en Inter Ecco, un embregerezh gourc'hwelioù prantadel (evel Manpower, BIS, h.a.). Dont a rae da'm gvelout sternioù eus Breizh o klask enfredañ e greantioù eus Paris renet gant Breizhiz, pe sternioù eus Paris o klask distreiñ da Vreizh ha kaset din gant ar sternioù breizhat. Diouz un tu all e veze broadelourion o klask kenkizañ Elysée-Bretagne hag e c'houlennet diganin o dero'houezañ en sozadur pa oant-int re anavezet. Tud all a zeue da'm borodif evit ma postfen arc'hant en ur SICAV breizhek (bet savet abaoe, hepdon).

"Ouzhpenn gant metou Kêr-Vreizh ez eo gant ar metou breizhek eus Paris e'm boa da droc'hañ.

"Skuizh e oan o klevout an dud o komz eus Breizh. (Tud 50 vloaz, abaoe 30 vloaz e Paris, o hunvreal e Breizh pa oant mennet da chom e Paris ma o doa ur barr-bevañ uheloc'h eget ar pesh o dije bet e Breizh).

"O tistreiñ da Vreizh e felle din fetissat komzoù an holl : va re, re ar metou breizhek, komzoù E.S.B..

"Kuitaat Paris oa dont er-maez eus an dislav ar etre va buhez er metaouioù arallek-breizhek, hag ar pesh a'm bounte en E.S.B..

"Santout a raen e vezen beuset tamm-ha-tamm e buhez Paris : keleier, kehenterezh er gêr vras, c'hoariva, skeudennva, sonadegoù, h.a.. C'hoarvezet e oa din c'hoazh soñjal distreiñ da Vreizh; met betek neuze e oa bet dreist-holl evit tostast da'm c'herent. E derou 1971 e oa deuet dic'houzañvadus din chom e Paris.

"Padal e vezen e darspredoù stank-ouzh-stank gant tud kellig 75. Komz eus Breizh, eus ar gevredigezh vrezhon pa oan hanter-veuzet e buhez Paris a oa din diaes.

"E 1968 a'm boa kejet ouzh ur bodad mignoned o chouchenna hag o reiñ kentelioù brezhonag. Nebeut a ziforc'h a oa neuze etre tud E.S.B. Paris ha tud Kêr-Vreizh : unan hepken a oa splann, ar yezh; tud E.S.B. ne gomsent nemet breshonag. E 1971 e oa kellig 75 ur bodad tud o labourat sirius. Kemmet oa o c'hamzoù; pollek e hañvasle din bezañ, ha tostoc'h d'ar vuhez, fetisc'h.

"Lodanaet e oa ivez gwel E.S.B. na oa ket ken bevrennet da Vreizh. U a groge neuze gant ur studienn war dispac'h Aljeria hag a sizoloas din un arvez eus dieubidigezh Aljeria a oa dianav din (ha na'm boa ket klasket anavezout). Un dispac'h a oa bet en Aljeria, Aljeriz o doa graet un dispac'h. Ha ne o kejañ bemdez gant

Aljerianed o labourat e Frañs, hag ar re-se degemeret e Frañs evel ar re izelañ, hag ar re-se a oa deuet a-benn, ha ne ouien netra. (E ti Citroën e oa "bougnoles" na veze ket komzet outo er-maez eus al labour; gwelout a raen o diaesterioù met ne glasken ket o anavezout, o c'hompren).

"E derou 1971 ivez e veze komzet kals eus marksouriezh en E.S.B.. Nevez e oa evidon. C'hoarvezet e oa din darspredif tud eus ar F.C.F. pa oan e ti Citroën; c'hoarvezet e oa din teurel er-maez eus Kêr-Vreizh faskourion vreizhek a zeus da vezañ trouzus ha dic'houzañvadus gant o folklor hitlerel. Netra. Ti Citroën pa oan eno a denne (evel al lu) d'ur familh vras ma oa pep hini en e lec'h. En Inter-Ecco e welen bemdez micherourion o klask gourc'hwel. (Estronion e oa peurliesañ ar re a zeue da Inter Ecco, eus Maroko, Aljeria, Tunisia, Spagn, Portugal, h.a.; a-raok dont da Frañs o doa da gacut ur gevrat labour; goude-se e oa ret dezho kaout ur gartenn labour, met evit se e oa ret dezho kaout un testeni labour, elise bezañ krog da labourat endeo. Betek 500 F e kouste dezho ar gartenn labour a-wechoù; darbennet e veze evit 6 niz da gentañ, evit bloaz goude-se, evit tri blaz d'an trade gwech... Arbennigourion eus Frañs, kefridiel pe a-berzh embregerezhioù prevez a yas dadTunizia pe da Maroko da zibab dre arnodennoù ar vicherourion varrekañ, evit o lesel dilabour goude ne a-wechoù. En Inter Ecco e veze kinniget d'ar vicherourion ur gourc'hwel distabil, met paset mat; ha kudenn ar re a zeue da labourat e Frañs oa gounit ar muiañ arc'hant er verrañ amser, evit distreiñ d'o bro goude-se).

"Ne vezen ket kement-se chalet pa veze lavaret din "marc'hadour sklaved", pe "marc'hadour kig", rak tro a'm eus bet da gavout gourc'hwel evit tud o tont eus an toull-bac'h ha da welout ar spi en o enebrezhoù marv. Evel penn-koskor en Inter Ecco e'm eus desket bezañ kalet gant ar vicherourion (goude bezañ roet goprou da dud na oant ket aet da labourat, ha na vezent ket gwel goude-se); dre forzh kejañ outo e'm eus ivez anavezet savid ar vicherourion.

"Korvoet e veze ar vicherourion en Inter Ecco. Eus un deiz d'e-gile e veze taolet ur micherour er-maez, n'en doa tra da lavarout. Ne oa c'hweluniad ebet en embregerezh; ne oa ket muioc'h a c'hwel-gevrat daoust da niver keitat ar vicherourion da vezañ dibaoeus e-tro 150. Ar gudenn evit an embregerezh oa goprou ar vicherourion an izelañ ma oa tu ha gouenn digant an embregerezhioù na labourant ar goprou uhelañ ma oa tu.

"Mui-ouzh-mui e'm boa diegi da implijout an dud gant an doareoù-se. En dibenn dreist-holl e vezen diaesaet hag e klasken souplaat an doareoù; me ne oan ket evit ober ouzhpenn uhelaat ar goprou. Betek neuze en Inter Ecco (evel e ti Citroën) e'm boa graet va labour en un doare sirius hag aketus; diouz ezhomoù ar renerezh. E derou 1971 en Inter Ecco e tilazen va labour.

"O klevout anv eus marksouriezh en E.S.B. e'm eus bet aon en derou. Da gentañ ne ouien ket petra oa. H. TREMEL a oa bet en toull ganin a oa o tegemeret ar varksouriezh hep diaester, ha hep desrann (o sevel F.C.B. edo d'ar mare-se). Eus Paris en em c'houlennet penaos e ve degemeret e Breizh. Sioulset an bet pa'm eus gwelst ne veze ket treuzplaket war Vreizh damkaniezhoù markour ar broioù all.

EMVR-119

"An diavarañ etre ar pezh a vennet ober ha va buhez e Paris o deus lakaet dic'housañvadus din chom pelloc'h eno. Adal c'hwevrer 1971 e klasken labour e Breizh. E mix ebrel 1971 es on distroet da Vreizh."

EMVR-319

Notennoù-klokaat an emezrann EMVR-319

Goulennoù graet ouzh an emezranner gant izili eus kelligoù all ha respontoù heñañ.

Gouenn. - Komz a ra an emezranner eus mae 1968. Mat e ve dezhañ ober un dezrann eus un nebeut darvoudoù : kostoù enebec'hwel, h.a.. Penaos e c'halle, war un dro en em bolitikaat evel Breizhad dispac'her hag en em gavout a-wechoù o tifenn ar batromed ? Daoust ha trekontet en deus e brantad broadelour (eleze, diouzh un tu Breizhis, diouzh an tu all Galloued, hep dave da stourm ar renkadoù) ?

Respont. - Nag e derou 1968 nag e derou 1971 ne'm boa ar binvioù evit gwelout fraezh er pezh a raen, ar stummadur ret evit dezrannañ ha kemer divizoù diwar an dezrann-se.

Bremañ e ve disheñvel : barrekoc'h e ven da zisplegañ da dud an F.L.B., Kêr-Vreizh, perak es an kuit eus an F.L.B. eus Kêr-Vreizh. Ur c'hoariva bras e oa mae 1968 : arvesterion a oa, ha c'hoarierion. Me a oa, gwech arvester gant ar studierion, gwech c'hoarier gant ar c'hostoù enebec'hwel. C'hweluniad ebet ne lakae e obererezh e doare sirius gant stourm ar renkadoù, sur mat ket ar C.G.T. a oa tuet kentoc'h da arc'hañ an urzh eget forsh petra all.

E Citroën e oa 70 % eus ar vicherourion na cant ket eus Frañs ha na raent foutre gant se. Estren e oa din ar pezh a c'hoarveze aze. Sur mat e oa ken estren da bPortugaliz, da Spagnoliz ha da vMagrebiz eus ti Citroën. Ne felle ket din lakaat o fiziañs dezhañ gourc'hwel a'm boa e ti Citroën evit traoù a santen estren din.

Ar c'hostoù enebec'hwel oa dreist-holl o roll diwall ar burev-studi ha sekredoù Citroën. Ur prantadig zo bet hon eus roet tu d'un nebeut micherourion da labourat.

Gouenn. - Anat eo e skrid an emezranner pouez an divezelezh. Chomet eo e-barzh an F.L.B. evit abegoù divezel-ha n'eo ket da heul un dezrann politikel (an dezrann en dije zoken e lakaat da guitaat F.L.B.). Evit an hevelep abeg divezel eo chomet rener Kêr-Vreizh, goude bezañ adskoulmet darempredoù gant E.S.B. : ne c'halle ket reiñ e zilez peogwir o doa tud Kêr-Vreizh roet o fiziañs dezhañ. Daoust nag emouiziekl eo ouzh an emsalc'h divezel ha dibolitikel-se a zo bet e hini ?

Respont. (Er respont a-raok e kaver un darn eus ar respont d'ober d'ar gouenn-mañ. Kellig an emezranner a ouzhpenn :) - Dirak ur bed graet ha frammet endeo, estren dezhañ e kement ma ne c'halle ket e dreuzfurmiñ, en deus bet an emezranner ersavioù divezel : an divezelezh hepken a roe dezhañ an tu da genderc'hel da vevañ en ur bed estren.

Evel Breizhis ar bed arallek n'en doa arrez politikel ebet en dije roet dezhañ an tu da zezrannañ ar bed-se ha d'e dreuzfurmiñ. An divezelezh hepken en skoazelle da dreuzvevañ er bed-se. (E-se pouez ar relijion e Breizh ?).

EMVR-320

Al labour a rae er bed arallek ne roe ket dezhañ gwerc'h-treuzfurmiñ war e saviad.

EMVR-320

Strollad Komunour Breizh. Dezrann ha diaveloù ballerezhel. (Skrid savet goude un heñliad kejadennoù gant ur stourmer eus SKB).

Krouet eo bet Strollad Komunour Breizh a dibenn 1970.

Goude darvoudoù mix mae 1968 e voe krouet ur Pocelligor dispac'hel brezhon gant tud eus FLB-2, Sav-Breizh, JEB hag all. Ennañ e kaved tud eus ar Mouvement Breton kozh : GEFFLOT, DREZEN, LE SCOUZEZEC. Ar CRB (teskanv e ditl gallek) ne oa ket un aocsdur frammet, gronnañ ne rae ken nemet tud o tont eus luskadoù all pa na cant e luskad ebet.

"Ar genañlec'h o deus diviñt krouiñ ur strollad komunour brezhon zo angoustlet abaoe pell er stourm dispac'hel a Breizh, anezho evit izili eus ar PCF heuzet gant e beoc'helouriezh-dañvad, o'hweluniadourion o sevel a-enep atoridigezh ar stourmoù o'hweluniadec'h, izili eus an FLB pellset diouzh ar gostezenn endarzhelour ha dehouat, orfin stourmerion o tont eus luskad mae 1968". Izili ar CRB a aozas devezhioù studi hag en o ser a brientas raktres Manifeste du Parti Communiste Breton (oahiers de stages). Goude ur prantad a vreuradurioù (gouere-kersu 1970) hag a emvodoù, e voe dalc'het e derou 1971 Kendalc'h savidigezh Strollad Komunour Breizh.

"Mennet eo SKB da grouiñ ur gevredigezh nevez anburzhazek diazezet war unvanded, breudeuriezh ha labour a-stroll ar bobl vrezhon, kaset d'ar stourm gant ar renkad vicherour. Sevel a ra a-du gant dieubidigezh Breizh, hervez an etrevroadelouriezh proleterezh. Strivañ a ray evit ur Vreizh poblek leviet gant kuzulioù al labourerion".

Setu e berr gomzoù diazez keñvadurezh ar strollad. En em ziskleriañ a ra "marksour ha brezhon". Dodennoù ar strollad a ra dave da drevadennerezh diabarzh, da nevezimpalaerouriezh o'hall.

Tu zo d'en em c'houlenn ar perag eus ur strollad komunour a Breizh ?

"Disoc'hañ a ra ivez krouidigezh SKB eus burutalladur emsalc'h ha bellouriezh ar seurtanvet nerzhoù "kleiz" ha "dispac'hel" e Frañs e-keñver hon c'hudennoù, eus o nac'hidigezh da anaout bezout ur gudenn vroadel brezhon zoken; o bellouriezh kempennelour, o c'houlataerezh hag o chaovinegezh c'hall-bras o divrud hiviziken dirazomp. Tamall a reomp d'ar PCF bezañ forc'het diouzh e dremenad dispac'hel...". Dave a ra ivez da Ar Falz : "Liammet eo ar gudenn vrezhon ouzh kudennoù ar broadoù gwasket gant an impalaerouriezh c'hall...".

Frammet eo SKB e kelligoù. Ar gellig zo diazez aocsadur ar strollad. E-barzh pep kellig e vez anvet ur sekretour hag atebion rekia da frammsadur al labour. Pep kellig he deus heñliad emredad politikel evit a sell ouzh an divizoù er par lec'hel e starn gura'hadur politikel ar strollad. Pennieinet eo ar c'helligoù gant ur Pocelligor-kreiz, levrierezh politikel ar strollad. Dilennet eo ar PK gant ar G'hendalc'h (Congrès). Lozadus eo e pep mare gant kenstroll ar c'helligoù bodet e kuzulidigezh vroadel engalvet gant an triferan eus ar c'helligoù d'an nebeutañ. Enañ ar PK dindan dezrann ar c'helligoù hag an emezrann.

War a hañval ez ansañ div gostezenn e diabarzh ar strollad : ur gostezenn vroadelour hag ur gostezenn "varksour". Enañ ar strollad e dar-empred gant Skol an Emsav a ra kentelioù brezhoneg d'e izili. Mennet int d'en em vrezhonekaat a-benn ren al labour politikel e brezhoneg.

Evit ar mare, goude ur prantad a eztrouadur gouez (tolpoù, emvodoù foran war ar gudenn iwerzhonat, h.a.) emañ en o soñj entreññ a-benn unvaniñ kelennadurezh ar strollad war boentoù loskus, evel ar vroadelouriezh, ar sokialouriezh, ar stourm-dieubiñ broadel. Lezet e ve an tuta da eil amkan ha muioc'h a zamant a ve roet d'ar frammadur ha d'ar stummadur.

Deurus eo degas amañ ersav SKB ouzh UDB (Bretagne Révolutionnaire 11, Piv eo an disrannerion ?). Keñveriet e vez UDB ouzh ar PCF ha lakaet da sokialdemokrat.

Gwelet hon eus penaos e tisoc'h krouidigezh SKB eus rukun tud 'zo ouzh politikerezh ar PCF, dreist-holl e-pad ha goude miz mae 1968 hag eus ar c'hejañ etre ar re-se ha tud zo eus ar Mouvement Breton kleizidik. Setu perak e vez kavet div gostezenn er strollad. Treuzplaket eo kelennadurezh MARX ha LENIN war ar werc'helezh vrezhon, arlivet gant ar gealiadurezh vroadelour. Ur paotr eus SKB a anzave zoken : "D'an deiz ma vo ur strollad marksour-leninour e Frañs hag en devo pledet gant kudenenn ar bihanniveroù ez emezelin e-barzh". Dave a reont ivez da zispac'hioù an Trede Bed : Vietnam ha Sina. Ar gostezenn "varkour" pe "kleizelour" a anad amañ. Met dre SKB o deus bet al ledensavioù (EBV, Skol an Emsav, JEB, PLB, h.a.) tu da zampredidiñ tud politiket ha dre se ez eus bet degaset er metaoù kulturel ur preder savet kudennoù niverus evit ar "gleizelourion vrezhon" : ar vroadelouriezh, ar gudenn vrezhon, h.a.. SKB en deus c'hoarriet aze ur roll-difreññ ha dre e gazetenn BR narpet emled mennoz ar stourm dispac'hel e Breizh. UDB he deus kavet ur strollad d'ober kevezerezh outi hag ouzhpenn se a-gleiz dezhi.

Dre e zampredidiñ gant ar metaoù kleizelour en deus ivez SKB ur roll da c'hoari. Gwelet hon eus hiladur SKB, e gealiadurezh, e zodennoù. N'eo ket frouezh un montkenderc'hañ, met kentoc'h un treuzplakadur war ar werc'helezh vrezhon. Merzet o deus ar mullgioù en o meizererezh eus ar werc'helezh vrezhon ha setu perak, war a hañval, ez int mennet da lakaat muioc'h a bouez war al labour diabarzh.

Penaos lec'hiañ SKB ? Mui-ouzh-mui ez anad ur birvilh e Breizh. Pet-ore roll e tile c'hoari SKB e bellouriezh an Emsav ? Ha penaos luskañ ar vellouriezh-se ? Merzet ez eus bet ur c'henn er pezh a lavare paotr SKB. Breaññ e tiogel e rank Breizhiz plediñ o-unan gant o c'hudennoù, anaout a ra spesadegezh ar stourm dispac'hel e Breizh, ha gwir groñs ar bobl vrezhon da c'hovaliañ hec'h-unan hec'h armoù.

D'hon menno e vefe dav gortoz o C'hendalc'h ha muzuliañ an emdroadur. Fellout a ra dezho ivez kaout lizheradur politikel : ar pennad war Citroën, Aperçu de l'histoire de Bretagne, L'impasse du mouvement culturel. Aze hon eus ur roll da c'hoari. Setu d'hon menno pezh a ve d'ober :

- Diskouez dezho istoregezh ar bobl vrezhon. D'en em lec'hiañ o deus e-keñver ar stourm-dieubiñ.
- Diskouez dezho spesadegezh ar stourm dispac'hel e Breizh.
- Tennañ kentel eus o obererezh :
 - + er boblañs. Ersav ar boblañs. Ha muzuliadus eo ?
 - + emdroadur o c'healiadurezh e-keñver broadelouriezh, marksouriezh, stourm ar renkadoù, h.a..
- O kemer perzh en dezrannoù beved ha c'hellomp.
- Dezrannañ o levezon war ar "gleizelourion" pe an dud nes.
- Luskañ un arc'hvel ledensav a-benn gourzhtreññ ar strolladoù, ar c'hweluniadoù gall.

Al labour-se ne c'hell ket bezañ kaset da benn hep ma kemerfemp ni hon-unan perzh er stourmoù pe hep ma'z estrofepp ur wech da vat.

(20 04 72)

EMVR-321

NOTENNOU KEVREDADEL (5)

KEVREDADOURIEZH A-ZONDER

Termet hon eus ar gevredadouriezh evel studi an anadennoù kevredadel hollet e par ar c'hevredigezhioù bloc'hel, ar renkadoù, ar strolladurioù hag ar c'hevredustedoù. Pouezet hon eus war lies-ventegezh an anadennoù-se : anadifiñ a ra ar werc'helezh kevredadel e-ser gwastadoù, liveoù, pazennañ pe gwiskadoù a-zonder. Diouz un tu, ar gwiskadoù finvus-se zo kenetreanket; diouz an tu all, e sav etrezo tennderioù, kenatourmoù, dislankoù dibaouez. Erest strizh e chomont etrezo, ha ne c'haller ket o digenvesañ hep lemel diouto o liesventegezh. Devoudel rik e vez e pep mare hag e pep degouezh an derezioù a zeskriver en o spanelezh pe o dispanslezh, o c'hevemplegadur hag o bleinekadur, koulz hag an urzhanoù diseurt a stader etrezo hag ar pouez kemeret gant unan pe unan all anezho e-touez an anadennoù kevredadel hollet. N'eus nemet ur studi gantouezek a oufe savelañ e pep pred hag e pep lec'h kenozadurioù dibarek ar pazennañdoù-se ha merkañ ar c'hempouezioù break a ya d'ober an enframmoù.

An adanv "a-zonder" ne ra ket dave enta d'un egor ergorel; talvezout a ra hepken da venegiñ un derez a ziasster bras pe vrasoc'h evit an imboure'her : donoc'h e lakaer ar gwiskadoù o c'houlenn ur striv brasoc'h da vezañ diraezet ha studiet. A-hend-all, pep gwastad a-zonder, ouzhpenn an devoùoù fetis a ro an tu da dishout en e amkan, a dalvez da argelañ an holl wastadoù all hag an anadenn gevredadel hollet.

Ma ne c'haller ket troc'hañ ar gwastadoù an eil re diouz ar re all anez goulloñ ar werc'helezh kevredadel eus he fetisted, ez eus tu bepred d'o stignañ e neur a soare disheñvel hervez ezbonnoù ar studi, - pe ar stourm (gwelet hon eus, Emsav 56/266 1971, e tiforc'he MARX peder fasennad en Isologiezh alaman, ha div hepken en Disgrinadur g'an armerzhouriezh). Titek eo bepred mui-pe-vat savelañ ar gwa-

adoù a-zonder pa n'int nemet binvioù daelerezhel da anaout ar werc'h-elezh kevredadel, "sternioù-oberata meizadel tost da ergoreladurioù ar werc'helezh hag azas oush an imbours'h kevredadour" (GURVITCH). Amañ, da heul GURVITCH end-eeun, e teskrivimp dek gwastad.

1. Ar gorre stummadel hag amvael.

An anvad-se a lakaer war ar "metaoioù" ken naturel, ken kalvezel, an traezoù, ar c'horfoù hag ar greadoù o kemer perzh er gedvuhez, mersadus. Er gwastad-mañ emañ diaz douaroniezhel ha poblañsel an anadennoù kevredadel hollet : pacted ar boblañs, an dasparzh anezhi e-keñver ar glenn, ar c'hendreiñ anezhi etre ar maezioù hag ar c'hêrioù, an hoaladurioù o c'hoari warni; sez hag annezad ar strolladurioù, tiriadoù ar c'humunioù ha parresioù, ar proviñsoù, ranndirioù, Stadoù h.a.; an adeiladoù, savadurioù, tiadurioù, ilizoù, ludioù, bac'hioù, tiez, foukennoù, lochennoù, greantioù, labouradegoù, stailioù; ar c'hehentoù, ar c'harbedoù, binvioù, ardivinkoù, ijinenoù, kenderc'hadoù gounezal ha greantel, an aozadoù bouedel. Seurt diavaeziadur eus ar werc'helezh kevredadel ned eo kevredadel koulskoude nemet e kement ma'z eo intret ha pleusket gant an ober denel a-stroll. Rak treuzneuziet e vez ar glenn, ar metou naturel, gant ar c'halvezerezhioù, al labour, an emsalc'hioù kevredadel, ar c'hredennoù strollennel eus ar c'hevredigezhioù a vev enno o tennañ korvo anezho; kresk pe digresk ar boblañs, ar c'hendroadoù anezhi a vez a-salc'h oush ar frammoù kevredigezhel, an emframmoù hag ar sternioù kevredadel, an askoradoù armerzhel, an arverioù, an argeloù, ar c'healioù, an talvoudoù, ar speredegesh. Anatoc'h c'hoazh eo an diazalc'h evit a sell ouzh ar c'hehentoù, an ardivinkoù, an traolioù, h.a. : n'eur evit intent penaos e vezont ijinnet, arveret, azasaet hep lakaat e kont un emell eus ar gwastadoù all.

Kement-se a adkaver e par an amzerlezh - hirbad, gorrek - hag an egorelezh - hogos unvan - a zo re ar gwastad-mañ. Hañvalout a reont bezañ tost d'an amzer ha d'an ec'honder alvezel, hag a gwir emaint aloubet gant amzerlezhioù hag egorelezhioù kevredadel all, spaneloc'h, doareadeloc'h, kargetoc'h a suladoù denel.

2. Ar benvegadurioù frammet.

Ar benvegadurioù (pe aozadurioù) frammet (pe urzhiadek) zo anezho greadoù strollennel raksavelet, kempennet, urzhasaet, kraisennet hervez patromoù erverket diwar-bouez braslunioù sonn pe sonnec'h, ha displeget peurliesañ e stumm dezvadoù. Ar gwastad-mañ so lec'h an destrizhioù embreged war ar berzhidi ha zoken an nannperzhidi; mont a ra an destrizhioù-se e kenstourm gant gwiskadoù all emdarshekoc'h eus ar werc'helezh kevredadel na zeuont ket a-benn da gaout korf en aozadurioù frammet dre ma'z int puilhoc'h, arlivetoc'h, gwevnoc'h egeto.

Ar gwastad-mañ, pe gwastad ar frammoù, a vez peurliesañ fiñvusoc'h ha nerzhaouekoc'h eget ar gwastad stummadel, hogen ivez alies ponneroc'h ha furnekoc'h eget gwiskadoù berusoc'h ar gedvuhez, - ar patromoù, an arouezioù, an arverioù, an emsalc'hioù, ar speredegesh strollennel. Roll un trelusker en devez e-keñver an emdarshegsh kevredadel, o vezañ e daelerezh ganti : he c'habestrañ a ra ha, war un dro, ne oufe diouerif ar buhezekadur o tont anezhi. Ur pellder bennak a vez bepred etre ar frammoù hag an anadennoù kevredadel hollet ha zoken an emfram anezhi. Kement-se zo gwir, n'eo ket hepken evit ar frammoù notrouniek, en em laka en treshont d'ar strolladurioù, renkadoù, kevredigezhioù a vennont aestroniañ, hogen ivez evit ar frammoù gverinek, pa'z a bepred ar gedvuhez emdarshek en tu all da gement framm 'zo, ha pa ve ar frammoù diwanet diwar he lusk ha bevaet ganti. A-hend-all, derez an diflachegezh, ar sonned, ar bellded keñverel eus ar frammoù n'emañ ket e dalc'h o urzhiadegesh diabarsh hepken, hogen ivez e dalc'h douested ar gwastadoù danlec'hiet, hag ivez an emframmoù kevredadel na kemeront perzh en o c'hempouez. E-se, e-touez ar rizennoù diseurt a emframmoù, e c'haller dispartiañ diouz un tu ar re ma c'hoari an aozadurioù frammet ur roll a bouez (da skouer an emframmoù bloc'hel kempred), diouz an tu all ar rizennoù emframmoù ma'z eo bihanoc'h o roll (da skouer, emfram ar gevalaouriezh kavasel en he derou). Da c'houde, mar tenn an emframmoù, dre berzh o aozadurioù hollek, da vezañ fiñvusoc'h ha nerzhaouekoc'h eget an aozadurioù frammet, e c'hell neozh an anadennoù kevredadel hollet danlec'hiet d'an eil re ha d'ar re all ober d'an aozadurioù bezañ gwech didarsadennekoc'h hag oberiantoc'h eget an emframmoù (evel er bed a vremañ).

gwech ponneroc'h, sonnec'h, gorrekoc'h egeto (evel er bed henstuzel, gladdalc'hel, pe dindan ar Renad Kozh, h.a.).

Un devoud zo direndael : ar benvegadurioù frammet n'int nemet estaolioù bepred skort ha darnel eus gwastadoù donoc'h ha diaesoc'h da dizhout er werc'helezh kevredadel. Emañ en un amzerlezh "trell-lagad", arouarek ha souezhennek war un dro, dastroc'het ma vez gant enkadennoù trumm ha tarzhadennoù dirakweladus. Dav eo enta kas ar studi en tu all d'ar benvegadurioù frammet. Chom a-sav en o far ha nevelebiñ ar gevredigezh vloc'hel, ar renkadoù, ar strolladurioù dibarek, an emframmoù kevredadel diseurt, ouzh an aozadurioù frammet diwarno - fazi graet koulskoude gant un niver bras a gevredadourion - zo emvac'hañ en un argerzhad aesaus moarvat, hogen dispennus, paouraat ar werc'helezh kevredadel o lemel diouti an darnvuiañ eus hec'h elfennoù-diazez, ober anezhi ur savadur strinkennet, sonn, echu.

J. Ar patromoù kevredadel, en o zouez an arhentoù, an arouezioù strollennel hag ar reolennoù.

Un domani ledan-kenan eo hini ar gwastad-mañ. Ennañ eñañ ar skeudennoù skouerikaet-skoueriekaus, an dezverkoù, ar brouderioù, an arhentoù, an arouezioù, ar reolennoù o sturiall n'eo ket hepken ar greadoù strollennel pe hiniennel, hogen ivez ar rolloù, an emzalc'h-
ioù, ha buhez ar bred hec'h-unan.

Liesseurt eo ar patromoù kevredadel : meuzioù broadel ha lec'hel, gwiskamantoù, kalvezderioù greantel ha gounezal, an dereadegezh hag an doareoù a sevander; en hevelep doare, ar gouelioù broadel ha lec'h-el, an diorreadurezh, ar vuhez politikel, gwiraourel, kravezel ha divezel en ur gevredigezh pe ur strolladur dibarek zo goustennet gant patromoù; al luganoù hag ar c'hlichedoù-lavar zo ivez da renkañ er bazennad-mañ. Meur a wech ez eo bet merket (da skouer, *Emsav* 6/129-132 1967) n'eo ket patromoù ur strollenn un teakad difiñv. Ur c'hen-dreñf disehan zo enno, gwech herrak gwech gorrek, a-geñver gant fiñv ar gwastadoù all, hini ar greadoù-nevesañ ha -krouiñ pergen. N'eo ket dav lavarout ez a ar gwastad-mañ pell en tu all da vevnnoù gwastad ar frammoù.

Boas euz da rannañ ar patromoù kevredadel e daou rumm : ar patr-

omoù stuzegesnel hag ar patromoù kalvezal. Ar re-mañ a denn d'ar vuhez armerzhel ha da rediezhoù pleustrel ar vuhez pendeziek : eñañ o fad-erezh e dalc'h o efedusted hag o fleustregezh. En eneb, ar patromoù stuzegezhel, a-salc'h ouzh an talvoudoù eorizhel, a ve dizalc'h o gwirigezh ha dre se o faderezh diouzh o efedusted pleustrek. Arabat koulskoude dispartiañ krenn an daou rumm, rak pap patrom zo bepred pleustrek hag eorizhek war un dro e derezioù diseurt, - ha setu perak e vez graet alies "stuzegezh", da heul ar stuzegourion o-unan, eus hollad ar patromoù stuzegezhel ha kalvezal. E gwir, mar seller ouzh ar greadoù armerzhel, en o c'haver intret a batromoù eorizhek kouls hag a batromoù pleustrek; heñvedra, an divezouriezh, ar relijion, an arz, an diorreadurezh, h.a., daoust d'al lec'h dalc'het enno gant an eorizhoù, ne oufent ket en em seveniñ hep o fatromoù kalvezal dibarek.

Emañ eñañ kentoc'h s'plet an diforc'h etre an daou rumm : o eorizgezh a ra eus ar patromoù kevredadel sturioù, heñcherioù, erverkoù, a-wechoù zoken reoladoù lakaet da wiriek hag eo'h endero'hel d'ar sentidigezh, strizh alies. Ha neozh, e weredont evel nerzhioù-devoudañ eus ar werc'helezh kevredadel, lodet ma's int enni war un dro evel kenderc'hadoù hag araezioù-kenderc'hañ, gwerc'hek int. Hogen ret eo mervout mat ar poent-mañ : gwerc'hek int dre m'o lakser da wiriek ha, war un dro, en o lakser da wiriek dre ma'z int gwerc'hek. Ereet-start e vez o gwerc'h-devoudañ kevredadel hag o gwirigezh, ar patromoù o vesañ war un dro arbennoù ha reoladoù ar greadoù strollennel.

Kemeromp da skouer an dilhad-lid gwisket gant ar vourc'hizion evit mont d'ar c'hoariva. En ur gwelad ster kentañ e kaver gwerc'h eorizhel ar patrom : dre an dilhad-lid e toujer da dalvoudoù an arz. Ar vourc'hizion avat ne zougont ket o chipennoù lost-pig hepken da gelañ an talvoudoù. Mar lakaont ar patrom da wiriek, ez eo dre ma's eus gantañ, ouzhpenn e werc'h eorizhel, ur gwerc'h-erzerc'hañ renkad : ouzhpenn bezañ ur patrom eorizhek ez eo o dilhad-lid ur patrom pleustrek deshañ gwerc'h er stoura a renkad, hag ar gwerc'h renkad-se (n'eo ket ar gwerc'h eorizhel !) a ra eus ar patrom ur reolad endalc'hus; ur gwerc'h-devoudañ kevredadel ez eo enta. E-se, an dilhad-lid zo war un dro ur c'hendero'had stuzegezhel hag un araez-kenderc'hañ er stoura renkad. N'o deus gwerc'h-devoudañ kevredadel nemet e kement ma anavez ar gwirigezh dezho, ha ne ves anavezet o gwirigezh nemet e kement m'o deus ur gwerc'h-devoudañ kevredadel.

Anat eo kement-se ivez mar seller ouzh ar patromoù dibar ez eo an arhentoù hag an arouezioù strollennel diouzh un tu, ar reolennoù kevredadel diouzh an tu all. An arhent kevredadel zo ur brouder diavaez o tresukas un urzh a-berzh ar gevredigezh pe ur strolladur

dibarek, oc'h erverkañ ar gread-mañ-gread d'o izili. Son ar c'hloc'h er skol a ro da c'houzout d'ar skolidi ez eo echu ar gentel; ar goulou ruz a laka ar c'hirri da chom a-sav. An arouezioù kevredadel zo extoladoù o treuzkas ur stlennad resis d'an dangorennoù strollennel pe hiniennel, dezho d'e arverañ. An daolemm e traoñ ar c'hendi a ro da c'houzout anvioù annezidi pep solieradur; ar banell er c'hroazhent a verk ar roudoù hag ar pellderioù.

Ur rumm eus an arouez eo an arhent; un arouez unsteriek ez eus anezhañ, na c'haller kaout en e geñver nemet daou ersav : sentiñ pe na sentiñ. Ar vredenizh a zeskriv daou dreug da anavezidigezh an arouez a) an treug hir : anavezet eo an arouez e fura an daouad kanteul-arganteul; an arganteul a vez danseet e-ser lankadoù-dezeviñ hir pe hiroc'h a-FROK t'ezañ arveret er moneadur (sk.: ar beajour o prederiañ dirak panell ar c'hroazhent evit dibab e hent) b) an treug berr, ma ne vez ket furmidigezh eus an daouad kanteul-arganteul na lankad-dezeviñ ebet, ster an arouez oc'h anadifiñ war ar moneadur nemetken (sk.: ar bienier o chom a-sav "ent emgefreak" e-tal ar goulou ruz). En ur c'hemeradur bredoniell-strizh n'eus nemet e-keñver an treug berr e c'haller ober anv eus arhent. Anat eo avat ne c'hell ket ar gevredadouriezh reiñ ur sterva ken strizh d'an termen-se.

Ar reolennoù kevredadel zo leun a arouezioù o c'hoari evit un darn evel arhentoù, o vezañ war un dro arbennoù ha reoladoù ar greadoù.

Ar patromoù kevredadel, an arouezioù hag ar reolennoù pergen, a aesa reoliegezh ar gedvuhez, dre levezonañ pe zoken o rediañ ar c'hraerion diouzh an dro. Koulskoude stre ar patromoù kevredadel (seul gent a se etre ar patromoù frammet eus ar gwastad a-raok) hag ar greadoù strollennel devoudel ez eus dislankoù bras pe vrasoc'h evel ma tiskouez ar gwastad da heul.

4. Ar greadoù strollennel damreoliek o c'hoarvezout er-maez eus ar benvegadurioù frammet.

Derc'hennoù difetis eo ar patromoù kevredadel, ha ne reer nemet an hanter eus an hent ma ne studier ket ar gwerc'hennoù fetis ma'x int bet distrihet diouto, ar greadoù strollennel o-unan. Forc'hadoù ha dislankoù diseurt zo etre ar patromoù kevredadel hag o gwerc'heladurioù : diglok pe amreoliek e vez ar re-mañ alies; c'hoarvezout a ra dezho ivez ken alies all mont en tu-hont d'ar patromoù, o reiñ

dezho astenn, klokadur pe, en eneb, ouzh o distummañ, o zreuzfurmiñ. Seurt keñveriadur a lak da c'hoarvezout besañs danlec'hiet pazennadoù all emdarzhkekoc'h eus ar verc'helezh kevredadel. Diouzh savboent ar c'hlotadur/forc'hadur etre ar patromoù hag ar greadoù e c'haller diforc'hañ an derezioù-mañ :

- a) Ar greadoù strollennel oc'h amparañ al liderezhioù hag an arg-erzhadurioù, diazezet war ur reolennadur strizh, furlmel rik.
- b) Ar greadoù strollennel ez eo an arverioù, ar stuizioù, ar sod-ellioù hag an doareoù-bevañ, kestouekoc'h a-galz eget ar re a-raok, a-vech oc'hallfede envel "folklor" er ster ledanañ.
- k) Ar greadoù strollennel ez eo ar gizioù, ar froudennoù berus ha-fforckemmus, a-geñver gant patromoù dizalc'h diouzh ar c'hustum pe ar-vech boaz, aznevezet dizehan. O c'havout a reer er gwiskamantoù, en arz, reer el lennegezh, er brederouriezh.
- d) Ar greadoù strollennel o terriñ ar patromoù, disuj, dic'hortoz, -e-disreol, digemplegus, enebus.

Gabriel LE BRAS en deus bet tro da stadañ penaos er moneadur kravezel e vez forc'hadoù bras etre al lidoù hag an arverioù : ar "gemplegerion rannvloziat", ar "reolvirerion" hag an "deolion" a heuilh an hevelep lidoù pa'z eo disheñvel-kenan o arverioù gwerc'hel. Amañ e verzer noazusted an termen "ensavadur" p'en lakaer da c'houlc'her war greadoù strollennel a reoliegezhioù disheñvel a lezer kemesket, kouls ha war ar benvegadurioù frammet ha war ar patromoù...

5. Anneuennoù ar rolloù kevredadel.

Hañvalout a ra ar greadoù strollennel damreoliek kaout da ziaser fuilhadeg ar rolloù kevredadel ensammet, dezerc'hat, c'hoariet gant ar strollennoù hag an hiniennoù. Ar rolloù kevredadel en o c'henaoadurioù ha kenintradurioù a ya d'ober ur gwastad a-sonder emdarzhkekoc'h eget ar greadoù damreoliek, kentoc'h ma's eget o fatromoù. Gwir eo, rolloù kevredadel 'zo gourlakaat ouzh ar greadoù a hañval besañ spisverkoù mat a reoliegezh, a reolennadur, a frammadur zoken. Mar seller a-dostoc'h avat, e tizolcer smañ ar rolloù-se sanket betek an donañ eus an ersavioù emdarzhkek, o reiñ d'ar re-mañ end-esun, ha pa vent hiniennel pe strollennel, an traoñ hag gement patron, erverkadur,

recliegzh kevredadel a zo ha, da heul, war bep skoueriekadur. Rak, evit gwir, dezerc'hadur ha kenaosadur fetis ar rolloù c'hoariet gant ar strollennoù hag an hiniennoù en un degouezh dibarek a zegas ar brasañ soueshennoù, o reiñ tro da zidarzhañ n'eo ket hepken d'an ersavioù envoustret, hogen ivez a-wechoù da ersavioù-nevezin ha -krouñ. Da studiañ ar rolloù kevredadel e ranker distremen da vat an enebadur ergor/dangor aet diarveradus : en o far ez a an trec'h gant "endon an dangorelezh" strollennel ha hiniennel d'an ampoent end-ecun ma tishont ergorelaat e-ser disoc'hoù hevera; heñveltra, e roont an trec'h da ergorelezh ar saviad d'an ampoent ma teu an dangorelezh e kont e-ser o dezerc'hadur.

Ar rolloù kevredadel a gaver e domanioù diseurt an ober strollennel : armerzhel (a-geñver gant rannadur al labour kevredigezhel ha kalvezel), politikel, c'hweluniadel, kefredele; pep hinienn, o kemer perzh e strolladurioù hag en obererezhioù disheñvel, a ensamm rolloù kevredadel lienseurt; rolloù ar renkadoù a gema ivez hervez an emframmoù hag, ouzhpenn, hervez an tuezioù. Lies rum a rolloù kevredadel a zeskriver. E-touez ar rolloù rakwelet pe rakveladus e tiforc'her ar rolloù brientek, ar rolloù frammet, ar rolloù gourlakaet, ar rolloù relikek, ar rolloù boas, ar rolloù iziunadek. E-touez ar rolloù dirakveladus e veneger ar rolloù neuennus, ar rolloù dic'hortoz, ar rolloù ijinet. Ar paoter-se a ro da vezañ un devoud, manet dianavez mui-pe-vui da zankanourion gent ar rolloù kevredadel a be luskad bennak ma vent (G.H.MEAD, R.LINTON, T.W.NEWCOMB, F.ZNANIECKI, T.PARSONS, h.a.) : gougevanet e vezont bepred ouzh un anneauenn, ul lankad pe, resisoc'h, ur gwastad n'int ken en "anadennoù kevredadel hollel", ha pep ster a ya diouto mar o diframmer diouzh ar re-mañ.

Ar rolloù kevredadel - loc'hvanoù fuilh da c'hreadoù strollennel ha hiniennel bezus, gwech o wero'helaat ar gortozed, gwech o nevezin hag o taskemmañ ar sternioù kevredadel ma c'hoarvezont, - ne vezont ket dezerc'het en o fesh e-ser ar greadoù hag a-wechoù ne vezont ket dezerc'het tamm ebet. Rak dialusk o ensammadur hag o dezerc'hadur a amplex un dindanad. Amparet eo an dindanad-se gant an emzalc'hoù strollennel.

6. An emzalc'hoù strollennel.

Domani an dihevent eo hini an emzalc'hoù. Merkomp da gentañ n'int ket bevennet d'ar bred. Kentoc'h ez eus anezho un aergelc'h kevredadel, un neuziadur o tennañ d'an anadenn gevredadel hollel. O deskrivañ a c'haller evel an tuedoù o luskañ an Hioù hag ar Meoù, ar strolladurioù hag ar c'hevredigezhioù a-bezh da ersaviñ an un doare resis, da ensammañ rolloù 'zo, da heuliañ argeloù dibarek. Evel just e c'hoarvez ne zeu disoc'h ebet, pe un disoc'h darnel nemetken, diwar ar raktuedoù-se. Met, zoken pa chomont galloudel, ez amparont un aergelc'h dibarek ma vez o soubañ an elfennoù frammet kouls hag ar patromoù, an arouzioù, ar reolennoù, an arverioù, ar gourshenebadurioù kevredadel, an talvoudoù hag ar c'healioù strollennel. E-se, an emzalc'hoù a c'hell reiñ lañs d'ar greadoù tamm-pe-damm relikek kouls ha d'ar greadoù-nevezin ha -krouñ a gavomp en ur bazennad donoc'h eus ar werc'helezh kevredadel. An emzalc'hoù strollennel zo war un dro neuennus ha dalc'hus, dic'hortoz ha rakveladus, dreist-diraec hag arnodadus. Ar gwastad diac'hinekañ a amparont evit gwir.

Feurliesañ e nañvalont bezañ dispac'hoc'h eget ma'z int; c'hoarvezout a ra dezho tarzhañ, eilpenañ, o tiguizhat islonkoù danlec'hiet. Enno e vez o nodiñ delanvadoù eus gwastadoù emdarshekok'h. Esunik e ve krediñ e c'haller treuzfurmiñ an emzalc'hoù strollennel diwar-bouez sarmonioù habaskaus, pe an addiorreerezh, ar bredelfennerezh pe ar sokiodrama e stern ur strollvezegerezh. Bez' e vez an emzalc'hoù oc'h argemmañ, oc'h eilpenañ a-geñver gant ar saviadoù bloc'hel (brezelioù diavaez, trevadennel, diabarzh, dispac'hioù, kenstourmoù ha kenintradurioù etre sevenadurioù, drouzivezhioù, amzervezhioù a hoalvat pe a chagadur, enkadennoù armerzhel ha politikel, daskemmoù e kensavlec'hiadur ar renkadoù, ademframmadurioù pe daskemmoù e-barzh an emframmoù).

Amzerelezh an emzalc'hoù zo amzerelezh an talmadoù direlikek, an neuennadoù dirakveladus etre diwan ha steuz ar c'helluskoù; amzerelezh arvarek dreist pep tra, erest ouzh an amzerelezh "trell-lagad".

Tu a ve da dermenañ an emzalc'hoù strollennel evel neuziadurioù kevredadel (Gestalt), galloudeloc'h eget gweredeloc'h, oc'h emplegañ war un dro ur speredegzh (gwellvezioù hag erezhioù kantaezel pergen), raktuedoù da c'hreadoù hag ersavioù strollennel, dougoù da ensammañ rolloù dibarek; int eo ar sternioù ma erserc'h an argeloù kevredadel ha ma vez darbennet pe argaset an talvoudoù spesadek.

7. An argeloù kevredadel.

Argeloù kevredadel a reomp eus arouezioù na roont nemet un estaol darnel eus ar pesh a aroueziont, hag a zo war un dro hantererioù etre an arouezied-se hag ar c'hraerion strollennel ha hiniennel o dedaol pe o degemer; ar roll hanterer-se zo anezhañ aesaat ar perzh-iadur keveskenn eus ar c'hraerion en argeledoù hag eus an argeledoù er c'hraerion. Pep argel kevredadel zo dezhañ daou vlein : diouzh un tu, ez eo un arouez diglok, un estaol digevazas; diouzh an tu all ez eo ur benveg-perzhiañ. An daou vlein-se a c'hell kaout pouezderioù keñverel disheñvel, hini ebet avat eus an daou ne c'hell steuriañ hep ma steuzfe an argel war un dro. Ha pa ve da gentañ kefredel, kantaesal pe youlel, erest ouzh ar gevrinelezh pe ouzh ar boellelezh, pep argel zo dezhañ da azon pennañ diouliañ en ur oueliañ, goueliañ en ur zioueliañ, luskañ d'ar perzhiañ en ur herzel outañ. Er c'heñver-se, an holl argeloù, hag an argeloù huneel ivez, zo anezho doareoù da gempenn, da heporiñ ar skoilhoù ouzh an estaolif hag ar perzhiañ. Eus an argeliañ e c'haller ober enta un arc'hwel enstag ouzh mab-den kemeret a-hinienn pe a-strollenn, - ar Me, an Ni, ar stroll, ar renk-ad, ar gevredigezh o vezañ da gentañ-penn ar saverion emouez pe di-emouez eus an argeloù diseurt o deus da gefridi mestroniañ ar skoilhoù pe da nebeutañ aesaat an ober outo.

Eus forc'hellegesh-diazez an arc'hwel argeliañ e teu un drama daouduel : a) Dizehan e vez an argeloù kevredadel en arvar da vezañ distremenet; nepred ne spiront penn-da-benn d'o c'hefridi, ken ma vez sareoù en istor ma'z eont teuc'h, ma'z eus tu da goma eus faezhadeg an argeloù - azon ur prantad-tremen pe -dispenn evit un emframm kevredadel b) An argeloù, e-lec'h estaolif ha luskañ d'ar perzhiañ gant an argeledoù gwero'hel, a c'hell dont da vezañ - a-sarn pe a-bezh - binvioù-dansen argeledoù diwerc'hel, eleze war un dro ur skoczell da vestroniañ ar skoilhoù hag un andon a skoilhoù nevez. Pelloc'h ez adkavimp ar gudenn-mañ, a zo hini ar c'healiadurezhioù, an utopiezhoù, ar gwengeloù.

Ur skouer deurus eus teuc'hidigezh an argeloù a anavezomp. Er bloavezhioù pemont e Breizh ez eas ar skrivadur peurunvan da argel ar vroadelouriezh, a oa er mare-se kealiadurezh an Emsav : war un dro e oa arouez an Emsav hag araez-perzhiañ en Emsav. Hiziv,

ar skrivadur peurunvan zo bepred hini an Emsav, nemet en deus paouezet a vezañ argel ar vroadelouriezh (p'he deus ar vroadelouriezh paouezet a vezañ kealiadurezh an Emsav, hag ivez pa vez arveret gant "broadelourion" kouls ha gant "rannvroelourion"), a vezañ ivez argel an Emsav (pa vez arveret gant nannensaverion kouls ha gant ensaverion ha dreist-holl p'en deus an Emsav bremañ argeloù all) - skouer eus teuc'hidigezh un argel. Koulskoude, brogarourion 'zo a gendalc'h d'ober eus ar skrivadur peurunvan un argel eus o c'healiadurezh hag eus an "Emsav". E-se, arver an argel-se hiziv a denn a) da savelañ un "Emsav" diwerc'hel e-lec'h ma n'eus Emsav ebet kan b) da zerc'hel pe da grouiñ e-touez al luskadoù brogar troc'hoù na giotont gant troc'h kealiadel na saviadel ebet k) da vouchañ an troc'hoù gwerc'hel etre ar saviadoù-kenderc'hañ hag ar c'healiadurezhioù, etre Emsav istorek hag Emsav davoudal, h.a. - kemend-all a skoilhoù diwanet diwar arver un argel teuc'h evel benveg-dansen argeledoù diwerc'hel.

Ar roll hanterer o devez an argeloù kevredadel zo e devoud o fiñvusted. Argemmañ a reont a-geñver gant a) an dangorenoù strollennel o danze, pe danseerion b) an dangorenoù strollennel o degemer, pe degemererion k) ar rizennoù emframmoù kevredadel, darnel pe bloc'hel d) an tuezioù dibarek (amzerioù peoc'h pe reuz, dispac'hioù pe enepdispac'hioù, brezelioù, flakadur, prantadoù-tremen, h.a.) e) ar sternioù kevredadel (kevredigezhioù, renkadoù, strolladurioù, kevredustedoù) f) daskemmadoù er c'heñver etre an argeloù hag an argeledoù (dreistpouez an argeled war an argel, dreistpouez an argel war an argeled) g) ar skoilhoù da drec'hiñ, ar plegennoù da vestroniañ diwar-bouez an argeloù h) al liv kefredel, kantaesal pe youlel a vez gant an argeloù pe an argeledoù i) an elfennoù gaouiat pe asvanek pe, en ebeb, hep mennoz-kuzh da douellañ pe da envataat, a vez an argeloù y) derez o strinkennadur pe o gwevnded j) derez douested pep hini eus ar gwastadoù a-zonder, lusk o argemmañ, feur an dislankoù hag ar c'henstourmoù etrezo. Seurt argemusted ha keñveriegezh dibar, azonus eus gwastad an argeloù, a lak a-wel an nesa-lezh kuzh a zo etre ar werc'helezh kevredadel a-bezh hag an argeliañ.

E gwir, en un doare, e tenn holl wastadoù ar werc'helezh kevredadel d'an argelerezh. Pep gwastad zo un argeladur eus an hollelezh digenoc'hadus, dre se un amavad darnel, diglok, digevazas eus an anadenn gevredadel hollel. War un dro, an torroù hag an dislankoù etre ar gweleadoù a vez stanket dibaouez gant argeloù dibarek oc'h arc'hvelañ neuze evel ur mani simant kevredadel berus hag hollvezant o silañ etre ar gwastadoù. En doare-se eo en em gav erest a-siforc'h

an argeloù kevredadel hag ar sevenadoù, al lavar, an anaoud, an divezezh, an arz, ar graves, ar gwir, ar c'healiob, an talvoudoù.

Koulskoude evit ma ve gwerc'hek an argeloù e rankont harpañ war gantouezadurioù ha kevarouezadurioù strollennel (kefredel, kantaazel, youlel) ha war ober-krouiñ an Nioù, ar strolladurioù, ar c'hevredigezhioù bloc'hel, oc'h amparañ e degouezhioù 'zo unanadurioù a-rack taol, o trehontañ amgant an argelañ hag ouzh e lakaat gallus.

8. Ar greadoù strollennel birvidik -nevezif ha -krouiñ.

Ar greadoù-mañ, ouzhpenn ma ne zalc'hont ket kont eus ar patromoù hag argeloù strinkennet, hollekaat, skoueriekaat, o laka en arvar, o diskar, o c'has da get evit desezañ o sevenadoù en o lec'h. Kement a zo bet diazezet, stabilaet, strinkennet arazo e werc'helezh kevredadel a gemer furn ur skoilh da sistremen. Diskar a reont urzhaz sav-elet ar frammoù, ar patromoù, ar rolloù kevredadel hag an argeloù, erlec'hiañ ouzh o ster stericoù nevez ha dic'hortoz, kas da get o gwiriegezh, imbroudañ kenac'hadurioù dispac'hus, o neusnevezif an emsalc'hioù strollennel o-unan. Ken dic'hortoz all ha direcliek eo donedigezh ar greadoù strollennel-se. Krouis int e kement ma teuent a-benn da amparañ frammoù, patromoù, argeloù, sternioù, emframmoù peurnevaz, da zigeriñ an hent etresek talvoudoù ha kealiou strollennel na meizadet na buhezet c'hoash.

Ur roll pouezus o devez ar greadoù-nevezif ha -krouiñ e degouezhioù kevredadel resis : en dispac'hioù politikel ha kevredigezhel, en amserveshioù adreizherzh, da geñver ar stroñsadoù bras e buhez ar relijionoù, ar brezelioù diabarzh pe diavaez, an treustiriadurioù, dizolcadur ar c'hevandirioù nevez hag o sevenadurioù. E seurt degouezhioù, ar patromoù hag an argeloù kozh a ya teuc'h ha faezh, n'int ket ken evit heñchañ ar greadoù strollennel; ar re-mañ a ya gant hentoù nevez, oc'h emazasaat ouzh plegennoù digent. Neuse e teu a-zizolo er werc'helezh kevredadel gwastad an nevezif, an dibab, an imbroudiñ, an divizout hag ar c'hrouiñ strollennel; seurt "dereziou eus rezid mat-den" (G.GURVITCH) a ya dreist pasennadoù all an anadennoù kevredadel hollel, tra ma's eo ar sevenif treo'h d'ar sevened.

Fazi e ve evelkent krediñ e c'hoari ar greadoù strollennel birvidik -nevezif ha -krouiñ en degouezhioù nemedennek hepken. Bezant int

e pep pred eus ar werc'helezh kevredadel e stuamoù liesdoare; mont a reont e kenac'hadurioù diseurt er rishennoù disheñvel a Nioù, strolladurioù, renkadoù ha kevredigezhioù bloc'hel. Testenioù anezho eo an tennerioù a sekriver etre an elfennoù anemframsel, emframmas, emframmet pe frammet eus ar gedvuhez, al luskou emframmas, dieframmas, ademframmas ha tarzhañ, an dielankoù etre an "anadenn kevredadel hollel" hag heñ ergoreladurioù, oberoù ha gwastadoù. Er c'heñver-se e c'haller lavarout e vez e pep kevredigezh, e pep stroll hag e pep Ni, un drama taer o treiñ dalc'hmat etre nerzhoù ar mirout ha nerzhoù an nevezif, etre an dispac'h peurzalc'hus hag an anepdispac'h ken peurzalc'hus all; e-se ez azlamm ar greadoù-nevezif e par pep gwastad a-zonder, o tevoudañ enno dasstourmoù ha harzderioù na zeont a-benn da drec'hif nemet en amveziadoù 'zo.

Un arvez eus an dafar danvezet gant ar greadoù-nevezif kouls ha gant ar greadoù oc'h enebif outo a gaver gant ar c'healiob hag an talvoudoù strollennel, - gwastad all o'hoash eus ar werc'helezh kevredadel.

9. Ar c'healiob hag an talvoudoù strollennel.

A-dreñv an holl rummoù greadoù hag emsalc'hioù strollennel, a-tizoloer an holl frammoù, patromoù, arouezioù, rolloù hag argeloù, e tizoloer un amgant all, hini ar c'healiob hag an talvoudoù strollennel. Kemseromp da skouer greadoù ha jestroù 'zo eus ur seuriad gouez, patromoù, arouezioù hag argeloù 'zo (klavioù, aornadurioù, gwiskantoù, ardamezioù, gweennoù, garmoù, kanoù, korolloù) ma tiavaez arezo e emsalc'hioù strollennel. Dic'hallus eo diverzout war-eeun petore erserc'hadurioù zo dindan an diavaezadurioù-se : ha moneadoù kravezet pe kevrinel, gwiradurel, milourel pe embleustrel ez int, pe ur bedadenn d'ur marc'hata kenverabel pe c'hoash kevarec'hadennou donemat. Anes intent an talvoudoù hag ar c'healiob empleget gant seurt anadennoù kevredadel hollel ne c'haller ket gouzout pesh a zo o treiñ. Heñveltra, stourm ar renkadoù zo war un dro ur stourm etre kealiob ha talvoudoù digendireadus, ha ne c'haller e gompren anez o intent. Heñveltra ivez evit an dispac'hioù hag an anepdispac'hioù ha, dre-vras, ar greadoù strollennel -nevezif ha -krouiñ.

Hogen, mar tenn ar greadoù-krouiñ danvez eus ar c'healioù ha talvoudoù strollennel, e weredont ivez warno en distro ken ma vez argerzhioù daelerezhel etre an daou wastad. En argerzhioù-se, e tiskouez ar c'healioù bezañ padusoc'h eget an talvoudoù ouzh delanvad ar greadoù strollennel -nevezñ ha -krouiñ; isfusoc'h d'ar re-mañ e vez an talvoudoù youlel, ar re liammet ouzh an divezelezh pergen, eget an talvoudoù kantaezel; ar c'healioù da sklaeriañ kerzh war-raok ar strollennoù a zeu alies gant dale hag e skornont re abred : skoilhañ a reont an nevezerezh dre en em lakaat da "anat", "disiouerus", "peurbadel"; e stumm "mennoziñ degeneret" e sachont war gil; an talvoudoù kantaezel, trivliadel, daoust d'o luskoù kaer, a chom alies bac'het en amzezelezh kelc'htroùs, piklamus; zoken an talvoudoù youlel hag oberel a c'hell chom sac'het, oc'h en em gendoniañ re aes kenetrezo, oc'h en em staliañ e saviadoù diazezet, oc'h en em lakaat da beurbadel, da raktonket; hogen pa'z eont en amzezelezh enraogus, oc'h ober anezhi amzezelezh didarzhadennek ar c'hrouerezh, e kavont ur bevennadur all gant berrbadelezh al lankadoù-krouiñ. E-se, an amzezelezh ma emañ an talvoudoù hag ar c'healioù zo maezienn ur stourm etre un enraog hag ur gouleroc'h na zisoc'h hag e stumm ur c'hempouez hag e stumm ur pebeiladur.

Eviti da gejañ, e-touez gwastadoù ar werc'helezh kevredadel, gant gwastad ar c'healioù hag an talvoudoù strollennel, n'eo ket emell ar gevredadouriezh diskoulmañ kudennoù a brederouriezh. N'eo ket ne roll diogeliñ gwiriegezh ergorel ar c'healioù hag an talvoudoù. P'en em gav ar c'hevredadour dirak kealioù ha talvoudoù perzhiat er werc'helezh kevredadel, n'en deus tra d'ober estreget stadañ devoudoù. Hag un devoud a rank anaout, hemañ : kealioù 'zo ne c'hellont bezañ kantaezet, buhez, kevarouezet, intentet, kadarnaet, anavezet er-maez eus ar greadoù strollennel. Emaint enta, kerkent ha ma pleder ganto, e diarsell ar gevredadouriezh; else, an hentoù a ya dezho, o sternioù-daveiñ a rank bezañ savelet gant ar gevredadouriezh; gant gerioù all, ar sternioù-daveiñ a'o intent ha d'o foellat zo sternioù kevredadel. E-se ez eur aotreet da savelañ kendaveadoù arc'hwelel etre kealioù ha talvoudoù 'zo hag al luniadoù kevredadel e vezont lodek enno, an emframmoù kevredadel bloc'hel pergen.

E berr, ar gevredadouriezh n'he deus ket da glask gouzout hag ar

c'healioù ha talvoudoù zo dizireadus d'ar greadoù strollennel o werc'hela, hag ez int dedaoladoù anezho pe hepken elfennoù eus ar werc'helezh. Afer ar c'hevredadour eo gouzout ez eus etre gwastadoù gwelaedet ar werc'helezh kevredadel ur gwastad ar c'healioù hag an talvoudoù, hag ez eus keñverioù daelerezhel etrezañ hag an holl wastadoù all.

Hogen ar c'healioù ha talvoudoù strollennel a rank bezañ intentet, kantaezet, anavezet. Kement-se hon degas d'ar gwastad a-sonder diwezhañ, hini ar speredegesh strollennel.

10. Ar speredegesh strollennel - Stadoù hag oberoù bred.

Erzerc'h eo ar vredelezh e kement gwastad 'zo eus ar werc'helezh kevredadel; kevaneke eo outi; n'he deus brilec'h ebet enni, nemet ez ampar ur gwastad pouesus anezhi evelkent. Ar gevredadouriezh a-sonder a intent pep devoud bredel, emouez pe diemouez, dizoloet er gedvuhez evel savlec'hiet er gevredadouriezh. Intent a ra an emskiant evel ken emmanus d'ar gevredigesh, d'ar bed, d'ar veziadslezh, ha ma'a eo ar re-mañ d'an emskiant. Diouzh sell ar gevredadouriezh ez eo ar vredelezh dre-vras, hag an emouezelezh pergen, werc'hennoù gougevanet ouzh werc'hennoù all. Emañ seurt emmanusted keveskemm ha seurt digorusted en o far bihanañ er "stadoù bred" (an darc'hadurioù, ar c'hounerezh, ar gouzañverioù hag ar boziñ, an danyouloù hag ar strivoù); emaint en o far etre gant ar mennoioù (bepred termus hag en amxivin); en o far brasañ gant an "oberoù bred" (nadañdennoù a liv kefredel, kantaezel pe youlel, ha barnadennoù).

Dre vras, e c'haller termenañ ar vredelezh evel "un drama a dennder kreskus pe digreskus etrezek an ersav emdarzh, a c'hell bezañ hiniennel, etrepersonel pe strollennel, a vez an tri war un dro paurliesañ. Er vredelezh hon eus n'eo ket hepken derezioù war greak pe war zigresk a dennder etrezek an emdarzh, hogen c'hoazh durc'hadurioù full etrezek ar par strollennel (Niou, strolladurioù, renksdoù, kevredigezhioù bloc'hel), ar par etrepersonel (etrehiniennel pe etre-strollennel) hag ar par hiniennel" (G. GURVITCH), - kement-se ha pa ve an emouez pe an diemouez e kaoz. Mar disoc'h an tennder-se gant arvestiñ gouzañvat ar skoilhañ, e reer anv eus "arc'hweleloù kefredel";

mar disoc'h gant azasadurioù ha kempennadurioù ouzh ar skoilhaù, e komzer eus "arc'helioù kantaazel"; erfin, mar disoc'h gant strivoù da zispenn ha da zistremen ar skoilhaù dre grouiñ saviadoù nevez, e komzer eus "arc'helioù youlel". Doareañ a c'haller al liv kantaazel evel "bredokoc'h" eget al liv kefredel, hag al liv youlel evel "bred-ekoc'h" eget al liv kantaazel. Anadiñ a ra amañ keñveriegezh ar vredelezh pa lakaer e kont bredegezh bras pe vrasoc'h an ersavioù hervez derez an tenader o tisoc'hañ ganto.

Pezh a vern amañ eo merkañ ne stader, e derez ebet eus ar vredelezh, dreistelezh ar par hiniennel, pe ar par etrepersonel, pe ar par strollennel; diouzh ar sell-mañ, evel diouzh ar re all, ez eo ar vredelezh un anadenn hollet. Ha n'eus abeg ebet da anaout hepken d'an hiniennoù (ar Meoù) ent distag pe en o darempredoù etrezo (an Hent-eziou) ar piaouerezh eus ar stadoù hag an oberoù bred a bep liv, pa nac'hfed e anaout d'ar strollennoù, d'an Nioù, d'ar strolladurioù, d'ar renkadoù ha d'ar c'hevredigezhioù. Ar speredegezh hiniennel, ar speredegezh etrepersonel hag ar speredegezh strollennel n'int nemet tri durc'hadur eus an anadenn vredel hollet, hag an tri durc'hadur-se ne c'haller intent ha studiañ nemet diwar-bouez goulaouadurioù liesel an dreistkantouezegezh daelerezhel : ar anglokausted, ar gevemplegusted, ar forc'hellegezh, ar bleinekadur, keveskemmed an diarselloù.

Ar argerzhad daelerezhel-mañ diwezhañ, keveskemmed an diarselloù a ziskouez ar vredelezh en un doare dibar-kenan. Lakaat a ra a-wel ur gevenmanusted etre ar speredegezh strollennel hag ar speredegezh hiniennel. An degouezh-se a gaver gant an oberoù-krouiñ a zo war un dro strollennel ha hiniennel. Neuze, an emskiantoù hiniennel ha strollennel n'int ket hepken dizierannadus, hogen kenintret gant kement a nerzh ma teuont da vezañ kevenmanus ha peurgenlotus. E-se ez adkavomp an emskiant strollennel en endon kreisañ hon me, hag a-c'hin, e stadomp ez eo e lankadoù tierañ ar c'hrouiñ strollennel e pacuz an emskiantoù strollennel a bouezañ war an emskiantoù hiniennel perzhiat enno; emañ an emskiantoù strollennel ennomp penn-da-benn, ha pep hini ac'hanomp zo penn-da-benn enno. En degouezhioù-se, ar furmoù diseurt a bouezadur a-berzh ar bred strollennel a c'hoari war un dro war hon emskiantoù ha war an emskiantoù strollennel; e gwir, ar pouezadurioù e kaoz a vez embreget gant gwiskadoù basoc'h eus an emskiant (hini-

ennel ha strollennel) war ur gwiskad donoc'h. Trec'h e vez enta ar gensturiegezh hag ar gemparzhegezh hiniennel/strollennel. Ne vezont trec'h avat nemet e degouezhioù 'zo. An oberoù strollennel ha hiniennel lakaet e diarselloù keveskemm a c'hell, e degouezhioù all, mont d'un troc'h, dont da vezañ forc'hellek, en em vleinekaat en-dro, distreiñ d'ar gevemplegusted ha d'ur geveskemmed nevez. Argerzhad keveskemmed an diarselloù ned eo ket enta un alc'houez o tigeriñ kement dor 'zo, hogen un doare da atersiñ pa fell d'an devoùoù atebif.

"An anadennoù bredel hollet pe a vez e diabarzh (e-giz kelc'hioù bihanoc'h) sternioù an anadennoù kevredadel hollet, pe a vez e-giz kelc'hioù a-skej outo. An eil tro-mañ a verk stad bremañ an darempredoù etre bredoniezh ha kevredadouriezh, rak emeur a-vec'h o teraouiñ studi gevredadour ar vredelezh reol ha klefvedel; an dro gentañ a verk ur stad eorizhek nad eo diraezet gant hini ebet eus an div skiant" (G.GURVITCH).

Gant an dezrannañ a-zonder ez a an trec'h gant an dreistkeñveriegezh hag an dreistkantouezegezh, henn mersét hon eus o stadañ penaos ez argemm gwredelezh ha galloudelezh ar gwastadoù, penaos dreist-holl ez eilpenn an urzhas a amparont. N'he deus ar vero'helezh kevredadel "natur" stabil ebet, ha n'eus nemet hentenoù daelerezhel evel re ar gevredadouriezh a-zonder a ve barrek da zisplegañ an devoù hollbouezus-mañ : e c'hell pep kevredigezh, pep renkad, pep strolladur zoken dansen ur meizadur disheñvel eus ar gevredadelezh.

